

Tud ar vro - Bro Leon
Roll kanaouennoù - Dañs a-benn

An Argoad, An Arvor

Dudius ez eo pourmen en Argoad, en Arvor
Kan ha sut al lapoused e beg ar gwez-derv

Sizun bro muiañ karet, illiz kaer, tour uhel
Gwiniz, balan marellet, brug, bokedoù kaer

‘N ur vont ‘treuzek Sant-Kadou, Sant-Riwal ha Brasparzh
‘Weler chapel Sant-Mikeal o lugerniñ en oabl

Lokefred ha Brenniliz hag ivez Sant-Herbot
Ur jube deus ar c’haerañ en iliz a welfot

An dour bras eus ar fardell, ‘zo ken sklaer en Uhelgoat
Paseal dre «Toull an Diaoul», e-touesk ar reier bras

Kommanna, n’ Dre ha Sizun, ez eus kalz milinoù
An dour ‘ruilh dreist ‘r rodoù vras, pa vez digor ar sklujoù

Azezet barzh an draonienn, e bordig an Elorn
Me ‘wel ur pesketaer a garié d’am c’halon

Ma fell dit, plac’hig yaouank monet betek ar mor
Deomp hon daou asamblez da bourmen en Arvor

Da Landerne, da Gerhuon ha Plougastell-Daoulaz
Eus Brest ha Landevenneg, ha ni ‘welo ar mor bras

Ar gouelini o leñvañ war ar mor atlantel
Met ni a gar o c’hlemmoù hirvoudus, troidellet

Ar stered er firmamant, pa deu douster an noz
Al loar o lugerniñ e-barzh an oabl don

Pegen kaer ‘vez o pourmen dindan bolz an neñvoù
En ur vale dorn-ha-dorn ha kontant hor c’halonoù

Kraozon, Terenez, Ar Faou, Rumengol hag Hañveg
Hag en distro da Sizun gant va muiañ karet

Plijadur ha karantez, n’eus bet o pourmen Bro
Ken kaer e oa an Argoat ha ken kaer an Arvor

*Adaptation pour la danse d’un texte de Marie MANAC’H,
(Aman zeus plijadur - Livret CD Dastum Bro Leon Juin 2003)*